



PEDEN AR MOUSIK BIAN

D'AR WERC'HES

Var don : Potret Plouilliau, Kan 75°

Ma mammik guez ha ma ferson
A lavare d'in bemde
Ho pedi a greiz ma c'halon
A da noz a da veure
Ma chelaouet Gwerc'hez santel,
Evit mamm ho kemeran,
Eur zellik hep quen, ia, eur zell
War ar paour Mouzik Bian !

An evnidigou pa greskont
A ia er mez euz ho nez,
Da guentan gant aoun e nijont :
Ho mamm zo var ho evez
Pel man ma mamm Gwerc'hez santel.
Evit mamm ho kemeran :
Eur zellik hep ken, ia eur zell
War ar paour Mouzik bian !

Pa meus bet lavaret kenavo
D'am mamm guez var e guele :
« Pegouls, emheie e vi distro ? »
Ma mamm baour a wele
Dinec'het hi Gwerc'hes santel,
He foan eo ma foan brassan ;
Eur zellik hep ken, ia eur zell
War mamm ar Mousik bian !

Ma c'hoarik vad ma c'hoar Anna
A iel d'an iliz bemde
D'ho pedi c'hoaz, Itron Varia,
Vit ma zad vidon ive,
Chilaouet Guerc'hez santel,
Eun ine diouz a gwellan :
Eur zellik hep ken, ia eur zell
War c'hoar ar Mouzlk bian.

Pa iem da laret hon pedén
Hon daouigou d'ho chapel
Ma c'hoar lare : « Sell eun dolen
« Var-n'hi ar Werc'hez santel
« Hag a c'hoarz ouzimp gant true ?
(A homp en oad teneran)
« Ma zellet ho ma breur ive
« A paour kez Mouzik bian ! »

Enn ho tolen, o Gwerc'hez kaër,
E weler ho mab Jezuz,
War ho tivrec'h buguel dister,
Ken mad, ken karantezus,
Ho mad dinac'h petra ne c'hall,
D'ac'h mamm ar c'halloudekan,
Gallout a c'hellet da diwal
Ar c'hez paour Mousik bian !

Ma mamm a laret din aliez :
Eo mestr a bep tra Doue :
Mes Jesus zo mab a Gwerc'hez :
Petra n'hell mamm eur Roue ?
Ma diwallet Gwerc'hes santel,
Evit mamm ho kemeran :
Eur zellik hep ken, ia, eur zell
War ar paour Mousik bian !

Propriété